

Berthou Erwan

(Alc'houeder Treger)

Pleuvihan (1861) – Pleuvihan(1933)

Daouzeg abostol, bet embannet e 1928.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Levezonet eo an oberour aliez gand ereadurez ar galleg.

Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

Taolenn

Lemenik

Abherve

Taldir

Kaledvoulc'h

Abalor

Barz Labourer ha Gwenedour (Loeiz Herriaou hag Andrew Mellag)

Telenn-Aour (Henri de la Guichardière)

Tangwall (Pol Diverrès)

Karevro (Francis Even)

Mab an Argoad (Alfred Lageat)

Maen Kaled (Renan Quillivic)

Mab Alan (Jul ar Groz)

Notenn (Ar hlotennou a-ziabarz)

Lemenik

(Yann ar Fustek)

Yann ar Fustek ne gren dirag den : digabestr !
'N e vuhez, penn-ad-benn, sonn e benn : atao Mestr !
Bezetao e Keumri o teski, gand aket,
Aviel or Ro-Goaz, war ar Faoz treh bepred.
Eur Helt emskianteg eo, barreg e spered
Da zazorhi frankiz ar Vreiziz hualet.
On eil Arzur !... Siwaz ! Tonkadur ar gwalleur !
Taol garo ar Maro hen sko a-raog e eur !

(A-berz "Embann an Hirwaz" : *Le Fustec (Rostrenen 1855 – Pariz 1910)*)

Abherve

Kromm e chouk !, eun tagos ! Tad koz ar Varzed !
'Zo bet koz a-viskoaz ; n'ez eo c'hoaz didonet !
N'ev nepred, ar paour-kêz, nemed lêz, lêz pe dour !
Ya ! med karantez Vreiz 'zo e-kreiz ar hlañvour.
'Vid or yez eur zalver, eur mager ; war eun dro
Tad ar Vreiziz feal ha didamall, tad ar Vro !
E Breiz n'eus den welloh na brasoh o vale.
Diskabell, Bretoned, saludit **Abherve**.

(A-berz "Embann an Hirwaz" : *Abherve, Fañch Vallée : Plounevez-Moedeg 1860 – Sant-Laorañs, Roazon, 1949*).

Euz ti Vallée, milin-baper, e Benah e oa. Savet en-doa eur geriadur galleg-brezoneg.

Taldir

Trived privarz¹ ! hemañ eo e ano **Taldir**.
Pevar lagad 'n e dremm hag int lemm evel bir.
Moan e vuzellou, peg², med ken c'hwek hag ar mel.
Pa gan dah e werziou, e zoniou e peb gouel.
Tehit diwar e hent, rag ne zent, penegwir
E spered a zo stenn hag e benn a zo dir.
Gantañ ar maout, ar vaz... Hogen toaz 'zo en go...
- An toaz er forn ! Da biou an dorn ?
o Din-me atao !

(A-berz "Embann an Hirwaz" : *Fañch Jaffrenou*).

¹ privarz : ger bet ijinet gand Berthou : kenta (?)

² peg : gouzoud a re chom peoh.

Kaledvoulc'h

Kaledvoulc'h, eun den krenn, gand, gand barveg³ gwenn ha bleo du,
Prest dalhmad da voulha, da droha tu pe du.
Hast en-devez, bep bloaz, da grapa war ar Mên,
Gantañ ar hleze braz⁴ 'n-eus biskoaz lazet den.
« Felloud 'ra d'ar paotr koz, war ar roz, digouinia. »
« Peuh a zo ? tud diroll. » Hag an oll a lar : « Ya ! »
« Hemañ 'zo eun tarzod⁵, eun Don Kichot buan,
A fraill, a draill ! 'vid eur heveill e saill en tan ! »

(A-berz "Embann an Hirwaz" : Erwan Berhou, oberour al leor-mañ).

Abalor

Kleier Roazon a gan, gantañ lakaet en brall ;
E bluenn lemm a flemm, beteg ar gwad, ar Gall.
Eur Barz baleer-bro, en em roet da Vreiz,
D'he hengoun keltieg ha barzeg ha d'he Feiz ;
Ti ar Grall⁶ a zo sklêr : ti ar Berr 'zo digor ;
Karantez ar mignon 'zo don en **Abalor**.
Laouen bemdez ! d'oberenn Vreiz e ro sikour !
-Emberr ar hanaber a gano war ar skourr !

Notenn gand an oberour : Kleier Roazon a gan : Allusion au début du mouvement breton actuel.

(A-berz "Embann an Hirwaz" : Léon ar Berr : An Erge-Vihan 1874 – Roazon 1946)

Barz Labourer ha Gwenedour

(Loeiz Herriaou hag Andrew Mellag)

Hañv-goañv, diskuiz ha skañv o zreid, heb diegi,
Bep sul en-dro, er vro, 'vel Sant Rok hag e gi,
Ar Hi a harz, ar Zant a hoarz d'ar hoz person⁷.
Hag a gan. (Kant koublad 'zo dalhmad e pep son).
Hag an daou Varz a harz, tredemarz ! « Dihunamb⁸ !
Paotred Wened ! War-Zao ! Merhed ! Kerzamb⁹ !
Kerzamb !
Kemend a dan, a drouz, a gan, a jabadaou¹⁰,
Ken ez eo dihunet Gwened ganet o-daou !

(A-berz "Embann an Hirwaz" : Herriaou : Henrio Kaodan 1879 – An Alre 1953). Mellag ?)

³ barveg : baro ; barveg eo.

⁴ ar hleze braz : notenn gand an oberour : L'épée des Cérémonies de la Paix au Gorsedd annuel.

⁵ eun tarzod : prest da darza sod.

⁶ ar Grall : sant Grall.

⁷ d'ar hoz person : d'ar person koz, e gwirionez.

⁸ Dihunamb : gwenedeg. Ano kazetenn Loeiz Herriou.

⁹ Kerzamb : gwenedeg : Kerzom.

¹⁰ jabadaou : jabadao (evid ar rim).

Telenn-Aour

(Henri de la Guichardière)

Daoulagad 'mêz e benn, eur varvenn velen-hir ;
Eur vouez kleuz 'vel eur horn ; en e zorn laonenn dir.
« Hemañ 'lah beleien, kristenien, a-vagad,
Hag ar hoz Drouized 'ra braoued gand o gwad.
Gand krohenn an Ankou 'ra stripou ha kig-sall,
En e vaner Korseul, ouz ar peul, penn eur Gall. »
« Gevier ! gevier ! tud fall Bro-Hall, biskoaz ! biskoaz !
Telenn Aour ne lazaz na kaz, na ki, na gwaz !

(A-berz "Embann an Hirwaz" Henri de la Guichardière ?)

Tangwall

(Pol Diverres)

Eun den a oar c'hwesa e nesa, rag e fri,
Mar n'en-deus daou droatad, en-deus marteze tri.
Eur gaerell-vraz, eur raz, ne zouj kaz, eur furcher,
E blijadur levriou, dornskridou, koz paper.
'N-eus diou vro : Breiz-Izel, e gavell, ha Keumri.
A zo Barz, Telennour, ha Yezour, 'n eur hoari.
« **Tangwall**, distro d'az pro, da vroig da gavell,
He mouez, mouez he hrampouez 'ya dit war an avel. »

(A-berz "Embann an Hirwaz" Pol Diverres : An Oriant 1880 – Abertawe 1946 ; Ab Sulio, Tangwall, Trivarz).

Karevro

(Francis Even)

Landreger ! Santual Sant Tual, kêrig koant !
Tost d'an Iliz, tostoh c'hoaz d'Aziliz, e hoant,
Karevro, den hegar. Ha piou eta n'hen kar !
Tregeriz, e Vroiz, a lar : noter hep par !
En e di, neiz ar yez. O pebez stal levriou !
Spered ar Vro, bepred en-dro d'ar priedou.
Foei d'ar galleg ! Ar brezoneg, reiz ha dinamm,
'Vag hebdale ar vugale ouz bronn ar vamm.

(A-berz "Embann an Hirwaz" : François-Marie Even : Lanneber 1877 – Landreger 1959)

Mab an Argoad

(Alfred Lageat)

Kuñv, helavar, atao el Loar, eur vouez klouar,
Kant kanaouenn, koant ha laouen, **Lajat** a oar,
A-raog an diskan krog¹¹, setu e veg en dour ...
« Kan dim eun all », a hoarz ar zal¹² d'ar haner flour.
« Gouzoud a ra kemend a dra¹³ : pedi, prezeg,
Lenn ha skriva, moulla, jedi beteg c'hwezeg.
Komz a bep tra, para koulz ha Pig Mirandol... »
« Eun hanter zant, lenneg ha drant, er bed diroll. »

(A-berz "Embann an Hirwaz" : Lageat ?)

Maen Kaled

(Renan Quillivic)

Beg ar Raz ! Ar Mor braz ! An Ivern ! eur vagig !
Nag a besk¹⁴ ! en o mesk, eur bugel : Quillivic.
Eur pesketour a oe, Mestr kizellour bremañ,
Ar paleziou 'zigor o dorjou dezañ.
E vrud a red ar Bed. Hogen, 'vel eur gwir Barz,
Da Vreiz, e vro, en a viro Awen e Arz.
« Orin kuzet en gwad ar Ouenn vad, hag a skoulm
On **Renan Quillivic** ouz on Mikael Koulm ! »

(A-berz "Embann an Hirwaz" : Quillivic : Kizellour euz ar vro-Vigoudenn).
(Mikael Koulm : Michel Colombe).

Mab Alan

(Jul ar Groz)

Jul ar Groz, da Vro-Zaoz, n'oa ket eet 'vid bale :
Peder yez, paotr Tredrez a zeskas hebdale.
Ha da Verlin dioustu, ha setu peder all.
Brezel braz : 'Mañ ar gwaz war an tal e Bro-Hall.
Eurvad ! yehed ! nerz ! ha spered ! Deg yez a oar.
Breiz eo e vro. Eñ a baro evid he gloar.
Mez da hortoz, yaouank ha koz, Breiziz Pariz,
En e vouez don, a glev o son, Kleier Kêr-Iz.

(A-berz "Embann an Hirwaz" : Jules Gros, euz Lokemo. Embannet e oa bet e leoriou gand
Emgleo Breiz).

¹¹ A-raog an diskan krog : a-raog kregi gand an diskan.

¹² ar zal : galleg. ar zaliad tud.

¹³ kemend a dra : fazi : kemend a draou ; kement tra.

¹⁴ Nag a besk : Nag a besked !

Notenn

Beirdd (*Barzed en kembraeg*) Keltia an Amzer Greiz a ree implij, en o gwerziou, diouz klotennoù a-ziabarz e tu-hont d'ar hlotennoù a-ziavêz, skwer :

Nouel quenomp joausomp glan
Gant diboan breman pobl an bet
Greomp melendy d'an mab bihan
A zo en bet man deom ganet.

(Burzud Braz Jezuz)

An daouzeg skeudenn “beirz“ a zo el levrig-mañ, o-deus klotennoù a-ziabarz ha klotennoù a-ziavêz (evel m'en-deus gwelet al lenner moarvad). Setu amañ, war-lerh, evid skwer (d'an dud dall ha bouzar hepken) eur skeudenn ouspenn (trizeg evid dousenn a zo marhad-mad) en hini¹⁵ ez eo merket ar hlotennoù a-ziabarz gand lizerennoù teo.

Notenn gand an oberour : Lezennoù ar werzoniez vrezonég a zo bet roet en eul levrig : **Kevrin Barzed Breiz**, embannet e 1912.

Srobinell :

E pep kendalh pa vez an hañvez arru tomm,
E weler Strobinell o sevel en e blomm.
Zell dehou, zell kleiz, abof, lak e gov war an daol :
« Mes bons amis, c'est de Paris que je venons,
Depuis trente ans, préchi-préchant : Parlez breton (!)
Mignoned, ra vezo ! ra chomo ! Karit oll
Koz ti ha koz votou, koz bragou... Ra chomo !
Ha daelou ar pikous 'ruill hep trouz er friko.

Piou Strobinell :

War ar yez vrezonég ne oar nag A na B.
'Vel eun danvez e oar, marteze, ober : bée !
E ano 'zo Jako, mar n'ez eo ket eun all :
Ha me 'oar ? ha te 'oar ? Galloud a rez furchal...

¹⁵ en hini : en pehini, er skrid orin.